



ITRON VARIA AR FOLGOET PEDIT EVIDOME

CANTIC

ITRON VARIA AR FOLGOET

Var ton : *Guers Lo-Christ an izelbet*

D'ar sul araoc guel an oll Sænt,
Er biavez dec-a-tri-uguent
Euz ar pevarzevet cauvet,
Comprenit-en mad Bretonet :

E tecedas Salaun ar foll,
Casseet, rebuted gant an oll,
Treted a zo, disquantied,
Eb croas, na belec anterret.

le e vuez a voa bet
er eun exempl vad bepret
ousquet var an douar yen
Ac humbl goulen an aluzen.

Ave Maria, emezan,
Selaouit-la mad anezan
Selaouit ; *Ave Maria*.
Salaun a zepre bara.

Cetu e beden ordinal :
Credabl na vonie hini al ;
Er façon-ze, dre Lesneven,
Eo e c'houllte an aluzen.

E c'hars eur feunteun, eullochen,
Savet a zindan eur vezen,
A serviche de l'geiz
E pep amzer noz a deiz.

Eno cousquet var ar c'haled,
Oc'h imita an hermited,
Divar bara a dour e veve,
Eb jamæs quen magadure.

Evit galloud en-em doman,
P'en-em zante revet er goan,
A ispill oc'h eur brancq neuze
C'hen-em vransquelle a zoare.

E keit a ma c'hen-em ige
Ous ar brancq guezan evel-se,
O ! ô ! ô ! ô ! ô ! ô ! Maria !
E vije clevet o cana.

An dud divardro a grede
E ranque bea sot an den-ze,
Ac etrezo n'er galvent oll
Partout nemet Salaun ar foll.

Erfin decedet p'er c'gaf-jont,
En anterri a zecid-jont
Dindan e vezen, dre n'allent qet
En laqât, emezo er veret.

Nac e binijennou calet,
Nac e oræson qer brudet,
Tra, emezo, ne doant oll
Nemetar merq e z eun deu foll.

Bref, n'er c'havout qet lin a gren
Da vea anterret e christen,
Ac eno en douar rectal
Er plantont evel ar chatal.

Mæs Doue, a bini ar gallout
A deu, pa gar, a ben a doul,
Evit lezel exempl a squer,
A brouv vertuz e zervicher.

Eur fleurdilizen gaër meurbet
Euz ar bez soudou zo savet,
A var e delliou ar c'homsou-mâ
O Mari ! Ave Maria.

Eurseurt miracleur vec'h brudet,
Tud a bep bro zo diredet :
Tud simpl no lang beleyen,
A velet o tond a vanden.

Enô da Vari eun Ilis
Batissa, oll ezint avis,
E memor ac e testeni
Ar miracle-se graet dre enni

An duc a Vreiz gant ardeur vras
De batissa en-em bressas ;
An Ilis savet a so anvet :
Itron Varia ar Folgoët.

Euz ar moment-ze, cals duqet,
Duqezet, princet, princezet
D'ar Folgoët so deut da bardona
A da Vari d'en-em voesta.

Cetu-int amân an tri Bap-ze,
Dele'hit sonj mad : Sixt pevare.
Innonçant eiz a Leon devet,
O zri d'ar Folgoët devouet.

Ac ar pezh eu deuz c'hoas tennet
D'ar Folgoët cals pelerinet.
O an induljançou caër
Enni qer stancq a c'honezer.

Da oll bardoniou ar Folgoët
Deja o devoa accordet
Da james cant devez pardon
D'an oll belerinet guirriou.

Er Folgoët memez induljanç,
A c'hraçou memes abondanç.
Vel zo e Rom a induljançou
En er ober e stationou.

Ar pardoniou principalla
A celebrer en Ilis-mâ :
E miz eost ar *sul quenta* ;
Er m. m. z miz *guel Mar a*.

Ouspen induljançou Bethlêm
Ac ive re Jerusalem
Re sant Jacques a ajouter
A re Laureta en eur guer.

D'an eisvet a viz guengolo
E teu pelerin a bel-bro,
Ennez eo deiz ar pardon bras ;
Mari en deiz-ze a c'hanas.

Ed ar bloas, o sacramanti
Pelerin devot da Vari,
Induljanç plenier en Ilis-mâ
Zo zur a certen evit-tâ.

Oh ! pebez dudi eo guelet
Processionou caër meurbet
Otond d'ar Folgoët en deiziou-ze,
Evit saludi Mam Doue !

Beb oferen d'an deiziou lûn
Vit an anaon bep sizun,
Induljanç plenier d'an nep pini
En tan c'hoas, a ve o tevi.

Processionou Lesneven,
Re Plouzeniel a Sant-Even,
Re Kernouez ac an Drennec,
Ac ive re Tregarantec.

Bep sul, bep guel pad miz maë,
Tud a bep bro, a bep contre,
En o dourn croas a chapelet,
D'ar Folgoët devot a zired.

Tud clan, tud infirm, impotant.
C'hui pere a guez e drouc Sant,
A c'hui graguez paour poagniet,
Da Vari-ta en-em voestet.

Ouspen an induljançou-ze
Accordet oll gant Jûl trede
Cals a re-al a gafen c'hoas
Fontet aman gant tri Bap bras.

Er brezelou, var ar mor don,
E creiz an danger, an drahizon,
N'oullac'h qet ober guelloc'h tra
Vit d'ar Folgoët en-em voesta.

Ar branellou a zo chomet
Ac a veler c'hoas er Folgoët,
N'ellont beza nemet mercou
Euz e faveur, e miraclou.

Deut c'hui pere ne ouzoc'h get
Da besseurt stad e zoc'h galvet :
Er Folgoët, an Itron Varia
A zesqo deoc'h an ent surra. ;

Deut-età oll a vir galon,
Deut oll gant guir devotiu,
Deut d'ar Folgoët da bardona,
Deut da Vari d'en-em voesta.

AMEN

